

# Ur c'hamion a Vro-Leon

*Paroles : Daniel an Douget*

*Musique : Jean-Luc Roudaut*

Ur c'hamion a Vro-Leon  
A oa o treuzin ar pont  
Ar pont bras e Landerne  
Evit mont de Vro-Gerne

E Bro-Gerne gant al laeron  
Setu laeret ar c'hamion  
Ha kaset da Loktudi  
Kuzhet-mat en ur c'harrdi

Er c'hamion e oa skoachet  
Daou archer a Vro-Wened  
Paket gante an daou laer  
Ha kaset da Vro-Dreger

E Bro-Dreger, e Lannuon,  
'oa bet barnet al laeron  
Kondaonet da blantan kaol  
Da viken e Kastell-Paol